

Live : **CE**

Niver a vugale o c'hoari : **6 pe 7**

Tudennoù : **ar yar vihan ruz
ar c'hog Indez
an houad
ar poñsined (2, da nebeutañ)**

Reizhoù c'hoariva : **ur c'hreunenn winizh
ur falz, ur freilh
ur sac'h leun, ur sac'had bleud, un dorzh vara.**

gwiskamantoù : **al loened gant maskloù
graet gant kartoñs livet, pluennoù,
(gant ma chomint hep stouvañ ar fri hag ar genou)**

klinkadur : **un daolenn vras treset warni endro an istor :
ur park, ur vilin, ur forn...**




Ar c'hoari : **an tudennoù o cheñch lec'h
hervez an istor dirak an daolenn livet.**
**Pep loen a ra e drouz
a-raok en em lakaat da gaozeal
ha kerzhout a ra diouzh e c'hiz.**



2

Digarezioù ar vugale



Live : **CE-CM**

Niver a vugale o c'hoari : **7**

Tudennoù : **ar skolaerez
ar vugale:
Yann, Mai, Tudual, Turio, Laorañs, Marc'harid.**

Lec'h : **ar c'hlas.**

Reizhoù c'hoariva : **taolioù (7 pe ouzhpenn)
kadorioù**


Ar c'hoari : **azezet eo ar vugale,
hag ar skolaerez a chom en he sav,
en o c'hichen.**



■

3

Al lapin, ar valum hag an olifant



Live : **CE-CM**

Niver a vugale o c'hoari : **3**

Tudennoù : **ul lapin
ur valum
un olifant**

Lec'h : **war un draezhenn**

Reizhoù c'hoariva : **ur gordenn
un daboulin
ur vodenn gwez livet**

Gwiskamantoù : **al lapin gant divskouarn hir
an olifant gant un drompilh ha dilhad louet ledan,
leun a dorchenoù pe garget a bluñvegou.
ar valum : gant ul lost ha dilhad glas, ledan,
leun a dorchenoù pe garget a bluñvegou.**



Ar c'hoari : ar valum hag an olifant zo lorc'h enno.
Kaozeal kreñv a reont. Emañ ar vodenn gwez
e-kreiz al leurenn, ar mor eus un tu,
an douar eus an tu all.
Al lapin a gomz outañ e-unan, dousik.
Er fin eo laouen-bras al lapin,
lammat a ra en ur vont kuit.



4

Manifestadeg al I oened



Live : **CE-CM**

Niver a vugale o c'hoari : **13 pe muioc'h**

Tudennoù : **an tad
ar vamm
Yannig
Lena
Ivon
an aotrou Biglouch
al loened :
ar c'hazh, ar c'hi, an azen,
ar pemoc'h, ar c'hog, ar yar, ar vuoc'h.**

Lec'h : **arvest kentañ : er gegin
eil arvest : er park
trede arvest:
er gegin da gentañ, e porzh ar menaj da c'houde.**

KLAS
2/3

KLAS
4

KLAS
5

6^{VET}



Reizhoù c'hoariva : **ur fuzuilh
un daol gant kadorioù
panelloù
ur pellgomzer**

■ gwiskamantoù : **Yannig gant dilhad lous
al loened gant maskloù na stoufont nag ar fri
nag ar genoù.**

Ar c'hoari : **ar ganaouenn a vo distaget
war don ar ganaouenn :
"A n'eo ket brav, a n'eo ket brav paotred
C'hoari koukou, c'hoari koukou ..."**



5

Fachet eo pesk-troc'h



Live : **CE-CM**

Niver a vugale o c'hoari : **8**

Tudennoù : **Pesk-Troc'h**
Pesk-Glas
Pesk-Melen
Pesk-Du
Pesk-Gwenn
Pesk-Ruz
Pesk-Ebrel
Pesk-Nij

Lec'h : **dindan ar mor**

Reizhoù c'hoariva : **ur roued**
gwiskamantoù pesked.

Ar c'hoari : **lakaat ar vugale da zrevezañ ar pesked**
o neuial dindan an dour.



■

6

Enezenn ar splahoum



Live : **CE-CM**

Niver a vugale o c'hoari : **10**

Tudennoù : **an ozhaç'h, Spontig, al lipouz, an hini fur,
ar farser, ar splahoum, 2 vugel, 2 soudard.**

Lec'h : **en un ti
e bourzh ar vag
war un enezenn**

Reizhoù c'hoariva : **ur roued
ur maskl bras-kenañ evit ar splahoum**

Gwiskamantoù : **al logod a c'hall bezañ gwisket
gant pep a gougoulenn a vo staget oute
divskouarn ront, ha pep a lostig.**

▼
KLAS
2/3

▼
KLAS
4

▼
KLAS
5

▼
6^{VET}



- Ar c'hoari :
- **e-barzh an ti : al logod azezet war un hanter gelc'h.**
 - **mont d'ar porzh an eil war-lerc'h egile en ur ober div dro war al leurenn.**
 - **e bourzh ar vag : emañ ar vugale renket e stumm ur vag hag o vrañskellat holl asambles betek ar cheñchamant amzer.**





Live : **CE-CM**

Niver a vugale o c'hoari : **16**

Tudennoù : **ar morvarc'h
an amboubal
Maeldwina
11 martolod
breur Maeldwina
Marzhin**

Lec'h : **er gêr
er porzh
e bourzh ar vag
war un enezenn**


Reizhoù c'hoariva : **ur c'horn-hud (evit ar morvarc'h)**



gwiskamantoù : **dilhadoù martoloded
Marzhin, un tog hir war e benn
an amboubal, dilhad ledan, hir, ha livet-flamm gantañ,
kerniel war e benn.**

■ Ar c'hoari : ... **e bourzh ar vag: ar vugale renket e stumm
ur vag hag o vrañskellat holl asambles, hag o vont
tout d'ar memes tu pa vez ar morvarc'h o skeiñ ouzh
ar vag.**





Live : **CE-CM**

Niver a vugale o c'hoari : **2**

Tudennoù : **Iwan
An itron Gall**


Lec'h : **E liorzhoù Iwan hag an itron Gall,
pep hini en e du.**

Reizhoù c'hoariva : **Mann ebet ispisial.**

Ar c'hoari : **Ankeniet eo Iwan.
Hegaset eo an Itron Gall.**



■



Live : **CE-CM**

Niver a vugale o c'hoari : **2**

Tudennoù : **Fañch Kergadioù
Yann Lagadeg**

Lec'h : **Pep hini a bep tu d'al leurenn,
pep a bellgomzerez gante.**

Reizhoù c'hoariva : **Div bellgomzerez.**



■

10

An Aotrou Peskof er restaoldi



Live : **CE-CM**

Niver a vugale o c'hoari : **2**

Tudennoù : **An aotrou Peskof
Ar servijour**

Lec'h : **En ur restaoldi**

Reizhoù c'hoariva : **a) Un daol staliet, ur gador hag
ur glenkell evit roll ar meuzioù.
b) Un davanjer, ur c'harnedig hag ur c'hreion.**

Ar c'hoari : **Naon bras en deus an Ao. Peskof.
Muioc'h-mui dipitet eo bep ma embann ar servijour
n'eus ket eus ar pezh en dije bet
an Ao. Peskof c'hoant da gaout.**



■

11

Pelec'h 'peus poan ?



Live : **CE-CM**

Niver a vugale o c'hoari : **2**

Tudennoù : **Ar medisin
An itron Klemmato**

Lec'h : **E sal-c'hortoz ar medisin da gentañ,
en e vurev goude.**

Reizhoù c'hoariva : **Div gador, ur saro gwenn hag
ur flistrell.**

Ar c'hoari : **Diskouez a ra an itron Klemmato
kaout poan vras en he skouarn.
Dizampart ha berrwel eo ar medisin
ken e pil troad an itron
e-keit m'emañ o flistrañ dour en he skouarn.**

KLAS
2/3


KLAS
4

KLAS
5

6^{VET}



■



Live : **CE-CM**

Niver a vugale o c'hoari : **3**

Tudennoù : **Jakez
Fañch
ar c'hi.**

Lec'h : **Er straed.**

Reizhoù c'hoariva : **UI lêrenn.**

Ar c'hoari : **Fier-ruz eo Fañch da zigentañ,
ha souezhet-bras Jakez. Un neuz mezhus a vo
gant Fañch er fin ha diskouez a raio Jakez
bezañ sabatuet neuze.**



■

13

Petra zo dindan da vantell ?



Live : **CE-CM**

Niver a vugale o c'hoari : **2**

Tudennoù : **Loeiz
Bernez**

Lec'h : **E ti Bernez.**

Reizhoù c'hoariva : **Dilhad tomm gant Loeiz.**

Ar c'hoari : **Loeiz, doare gogez gantañ ha Bernez
oc'h ober goap outañ.**

▼
KLAS
2/3


▼
KLAS
4

▼
KLAS
5

▼
6^{VET}



■



Live : **CE-CM-6vet**

Niver a vugale o c'hoari : **3**

Tudennoù : **Fañch: ur furlukin
Jakez : ur furlukin all
Rozenn : ur plac'h yaouank.**

Lec'h : **ur sal-debriñ gant un nor da zont tre
hag unan all da vont er gegin.**


Reizhoù c'hoariva : **un daol ha kadorioù
listri war an daol
kastelodennoù d'ober trouz.**

Gwiskamantoù : **Rozenn, giz kêr
Fañch ha Jakez, dilhad furlukin ganto.**



Ar c'hoari : **Jakez zo ur furlukin fin ha Fañch
ur penn skañv anezhañ.
Displegañ a ra Jakez an traoù gant jestroù.
Rozenn, kalz a ardoù ganti a zeu tre hag a ya
ouzh taol. Graet e vo trouz gant kastelodenoù.**





Live : **CM-6vet**

Niver a vugale o c'hoari : **3**

Tudennoù : **Job
Lom
ar vuoc'h**

Lec'h : **war an hent**


Reizhoù c'hoariva : **lunedoù**

gwiskamantoù : **dilhad Sul ganto.**

Ar c'hoari : **Job ha Lom a ziskouez bezañ mezv-dall.**



■



Live : **CM-Skolaj**

Niver a vugale o c'hoari : **2**

Tudennoù : **an tad
ar saveteour**

Lec'h : **war vord ar stêr (al Leger)**

Gwiskamantoù : **dilhad sport gant ar saveteour
dilhad labour gant an tad**

Ar c'hoari : **an tudennoù en o sav e-kichen ar stêr
an tad : sioul e-penn kentañ,
hag an imor fall o kreskiñ ennañ
ar saveteour : sabatuet e fin an abadenn.**



■

17

Ar marc'hadour ardivinkoù hag e bratik



Live : **CM-Skolaj**

Niver a vugale o c'hoari : **2**

Tudennoù : **ar praktik
ar marc'hadour**

Lec'h : **ur stal glinkailherezh**

Reizhoù c'hoariva : **ur c'hontouer
un nebeud ardivinkoù a bep seurt**

gwiskamantoù : **ar marc'hadour gwisket gant ur saro
ar praktik gant dilhad bemdez**

Ar c'hoari : **emañ ar marc'hadour a-dreñv e gontouer.
Pa vez goulennet un dra bennak digantañ
ez a da glask anezhañ dindan ar c'hontouer.
Emañ ar praktik dirazañ.**



■



Live : **CM-Skolaj**

Niver a vugale o c'hoari : **5**

Tudennoù : **Lanig al Louarn
Gwilhoù ar Bleiz
An aotrou
daou gi**

Lec'h : **war ur stank skornet**

Reizhoù c'hoariva : **ur c'hleze
ur sailh
malzennoù erc'h graet gant polistiren drailhet
ha strewet war al leurenn, laosket e vo
un toull goullo en o c'hreiz.**

▼
KLAS
2/3

▼
KLAS
4

▼
KLAS
5

▼
6^{VET}



t ?

Gwiskamantoù : maskloù gant pep loen
(gant ma ne vo ket stouvet ar fri hag ar genou)
al louarn : dilhad rous hag ul lost hir gantañ
ar bleiz : dilhad louet hag ul lost hir gantañ
an daou gi : dilhad gwenn ha du ganto
an aotrou : dilhad noz gantañ.

Ar c'hoari : ar goulou a vo hanter vouchet evit an noz
ha pa zeuio an deiz e vo divouchet.
Pa vo poent stagañ ar sailh ouzh lost ar bleiz
e vo lazhet ar goulou da dennañ ar sailh kuit
eus al leurenn hag evit ma pucho ar bleiz.





Live : **CM-Skolaj**

Niver a vugale o c'hoari : **2**

Tudennoù : **Yann
Pêr**

Lec'h : **en aerborzh**

Reizhoù c'hoariva : **ur valizenn**

Ar c'hoari : **Yann zo ur peizant pinvidik, lorc'h ennañ,
ha Pêr ur mevel sentus.**

▼
KLAS
2/3

▼
KLAS
4

▼
KLAS
5

▼
6^{VET}



dud da semplañ

■

20

Perak loeroù ken bras ?



Live : **CM-Skolaj**

Niver a vugale o c'hoari : **2**

Tudennoù : **Maijan
ar varc'hadourez**

Lec'h : **en ur stal dilhad**

Reizhoù c'hoariva : **ur c'hontouer
ur bragoù ledan, ur re loeroù bras
ur stammenn ledan, ur sac'h lâr
ur re votoù bras-kenañ.**

Ar c'hoari : **erruout a ra Maijan er stal, ur sac'h lâr
ganti, botoù bras ennañ. Ar varc'hadourez a ya da
glask an dilhad en ur sal a-dreñv pe dindan ar c'hon-
touer. Sikouret e vo Maijan d'en em wiskañ gant
ar varc'hadourez. Er fin e tenno Maijan ar botoù
eus he sac'h d'o diskouez d'ar varc'hadourez.**



■

21

Ar pilulennoù da yaouankaat



Live : **CM-Skolaj**

Niver a vugale o c'hoari : **8 pe 9**

Tudennoù : **Yannig
ar vamm
paotr al lizhiri
ar plac'h yaouank
maouezed (4 pe 5)**

Lec'h : **arvest kentañ : el liorz
eil arvest : war gae an ti-gar
trede arvest : war gae an ti-gar.**

Reizhoù c'hoariva : **ur valizenn
ur bal hag ur rastell
ur sac'h lèr
ur boupinell
ul lizher.**

KLAS
2/3

KLAS
4

KLAS
5

6^{VET}



gwiskamantoù : arvest kentañ :

**Paotr al lizhiri : gwiskamant glas, ur gasketenn,
hag ur sac'h lèr gantañ.**

**Ar vamm : gwisket lous, heuzoù kaoutchoug
hag un davañjer lous ganti.**

Blev gwenn ha feson kozh warni.

Ur rastell en he dorn.

Ar paotr : dilhad labour hag ur bal gantañ.

eil arvest : Ar vamm : gwisket er memes mod.

Ar paotr: dilhad martolod hag ur valizenn gantañ.

Ar maouezed : gwisket cheuc'h.

trede arvest : Ar paotr : gwisket er memes mod.

**Ar plac'h yaouank : gwisket prop, gant ur sae ha
botoù lèr. Ur boupinell ganti en he divrec'h.**

Ar c'hoari : arvest kentañ :

paotr al lizhiri : un doare farsus dezhañ.

eil arvest : ar maouezed o vont

hag o tont war ar c'hae.

trede arvest : Yannig, skuizh, mall warnañ gwelout

e vamm en-dro hag o sellout tro-dro dezhañ

e-keit m'emañ ar plac'h o tostaat,

ar boupinell ganti en he divrec'h.





Live : **CM-Skolaj**

Niver a vugale o c'hoari : **3**

Tudennoù : **ar mezeg
ar bugel
an itron**

Lec'h : **en ti**

Reizhoù c'hoariva : **ur gador-vrec'h
ur pallenn (pe ur sae-gambr)
ur bragoù bras a-walc'h
ur valizenn vihan evit ar medisin.**

▼
KLAS
2/3

▼
KLAS
4

▼
KLAS
5

▼
6^{VET}



Ar c'hoari : ar paotrig, lakaet e zaoudroad
e memes gar e vragoù, a zo en e goazez
er gador-vrec'h, kuzhet e zivhar gant ar pallenn.
Pa glask ar vamm lakaat anezhañ en e sav
ne vez diskouezet nemet e gostez d'an arvesterien.
Troet e vo ar paotrig war zu an arvesterien
e fin an abadenn da ziskouez gar e vragoù goulo.
Tu zo da wiskañ ar paotrig
gant ur sae-gambr da guzhat e zivhar..



23

Mamm-gozh n'eo ket fur



Live : **CM-Skolaj**

Niver a vugale o c'hoari : **2**

Tudennoù : **ar vamm-gozh
ar bugel**

Lec'h : **ur gambr**

Reizhoù c'hoariva : **ur seizenn, ur gwele gant ur pallenn.**

gwiskamantoù : **hervez ar c'hoant**

Ar c'hoari : **ar vamm-gozh en he gwele,
seizennet he fenn penn-da-benn
war-bouez ul lagad.
Ar bugel en e sav en he c'hichen.**

▼
KLAS
2/3

▼
KLAS
4

▼
KLAS
5

▼
6^{VET}



■



Live : **CM-Skolaj**

Niver a vugale o c'hoari : **3**

Tudennoù : **Gwilhoù ar Bleiz
Gwreg ar Bleiz
Lanig al Louarn**

Lec'h : **e ti ar bleiz**

Reizhoù c'hoariva : **morzhedoù-hoc'h,
gwiskamantoù bleiz ha louarn,
gant maskloù na stoufont
nag ar fri nag ar genoù.
Un tamm lien d'ober mogerioù an ti,
d'al louarn da dremen dindanañ.**

▼
KLAS
2/3


▼
KLAS
4

▼
KLAS
5

▼
6^{VET}



■



Live : **CM2-Skolaj**

Niver a vugale o c'hoari : **3**

Tudennoù : **Tin Vras
Laou an Togn
An ostiz**

Lec'h : **er straed da gentañ en ostaleri da c'houde,
un nor hag ur prenestr.**

Reizhoù c'hoariva : **un daol ha div gador
listri
un tamm paper (an notenn)
ur mouchouer**

Gwiskamantoù : **an ostiz gant un tog
hag un davanjer wenn
Tin ha Laou, dilhad toull ganto.**

Ar c'hoari : **Laou a zo finoc'h eget Tin
hag a glemm er penn kentañ.**



■

26

E burev ar c'homiser



Live : **CM2-Skolaj**

Niver a vugale o c'hoari : **3**

Tudennoù : **ar c'homiser
an aotrou Storlok
ar poliser**

Lec'h : **ur burev gant un nor.**

Reizhoù c'hoariva : **ur burev hag ur gador
un eurier**

Gwiskamantoù : **ar c'homiser hag an aotrou Storlok,
gwisket cheuc'h.
Ar poliser, dilhad poliser gantañ.**



Ar c'hoari : **Evit kregiñ eo azezet ar c'homiser
a-dreñv e vurev, an aotrou Storlok
en e sav dirazañ. Emañ ar poliser o c'hortoz
er-maez eus ar burev. Er penn kentañ eo seder
ar c'hoari, ha tamm-ha-tamm
e sav imor fall enno.
Kaozeal a reont kreñvoc'h-kreñvañ.
Sevel hag azezañ a ra ar c'homiser
hervez ar c'hoari.**

